

Pourmenaden Fenelon,
 arc'hescop Cambrai,
 An tenerra hac ar quella eus an oll dud.

(323, suite)

Un douzder ar vrassa a zantân em c'halon,
 Pa deu bars em speret vertuziou Fenelon,
 Ar Prelat humen-ze, qer mad, qer gentezus,
 Qer sansibl, qer tener ha qer carantezus!
 C'hoant a meus da zespeign un act a vadelez
 A rentas hac a ras bonneur un tiequez.
 Ma n'ellân er renta vel m'eo dleet errad,
 Diana vo quelet va oll bolontez vad.

(324)

Victim eus an ^{injen}inting hac eus ar c'halomni,
 Ha dre un exil nobl e speret a expi,
 Fenelon em Cambrai a guez nebeut al lez,
 Hac oc'h ober ar vad e receo madelez;
 Instrui, consoli a rê an oll d'e c'his,
 Ar bobl, vit e zelou, a rede d'an ilis.
 Comz a rê, peb calon a zigore d'e vouez;
 P'en doa en bêleg sant bet douguet an oll bouez,
 E clasqe, vit disquiis, pa dostae an nôs,
 Gemeret a gostez un nebeudic repos.
 Var ar meaz, er c'hoajou, pe fong an draouniennou,
 E care calz ober e bourmenadennou.
 Pebes joa a zanté eno var ar yest glas!
 Eno, ouz bolz an ên e sav e speret bras,
 E vedit, e compos, eus a nerz e ene,
 Gement a scriidou caer a lezas e c'houde!
 Biscoas eun orgouill vên nênn hastas da scrifa:
 E galon qer mad eo a deu d'en inspira.
 Fellout beza util e zeo e vrassa c'hoant,
 Disquez ar virionez eo e zezir ardant.
 Laqat an oll da zont da garout ar vertus,
 Ze eo vrassa dezir an etoc'p generus.
 E sellou animet eus ur saezen celest,

(325)

A sav eus e dréjou ar vajeste modest ;
 E vent zo huel, nobl ; en e zorn zo eur vas ;
 Seul, hep brasder nac aoun, dre 'n hent ya tranquil bras.
 Contempli ra dre oll, o sônjal en Doue ;
 Bizita ra 'z paysant, ar joa en e ene .
 Etouez an dud qez-se, alies argeet,
 E joa vrassa a zo o gûelet gûjê hepret.
 Selaou o oll glêmour, a deu d'e soulaji,
 Poqat d'ar vugale, eva eus lèz an tîj .

(326) Un devez, o pourmen, pellic demeus ar quèr,
 Ech appercev qergent eur vilajen dister ;
 Eur c'hos tîc paour plous a fix prest e sellou,
 An druez er c'hundu ; eno voar en daelou .
 Antrou a ra ractal qergent an dud paour-za
 A dav o oll glac'har dirac an den-Doue .
 « Oh, Jesus ! emezo : hor prelat ! stoump prest . . . »
 En a vel gant joa vras qement a interest .

— « O va bugale quer ! Petra eo ho clac'har ?
 » Coutit din hoc'h angen, ha mar ma em pouvoar,
 » Me rayo va fossubl' evit ho soulaji,
 » Ha da laqat ar joa da rêm ebarc ho tîj .
 » Na abusin en tra demeus ho confianç . »
 Neuzje voet hardissoc'h, hac ar vam a goumanç ;
 — « Pardonit deomp, Autrou, mes na ellit netra ;
 » Ar peyz hor glac'har oll, allas ! er moment-mâ,
 » E zeo hon oll fortun : Hor bioc'h zo collet ;
 » N'hor boa nemet houunes, hac e zeo dianqet !
 » Allas ! Margodic qez ! na velimp qen anei :
 » Autrou prelat, sonjit er c'heuz hon deveus dei !
 » Gant ar blei, marterze, e zeo lounqet brema,
 » Ha ceta ni hep lèz hac hep amann amâ ! . . . »

(327) — « Tavit, va bugale, n'en em desolit mui :
 » Ho maleur, a gred din a eller repari .
 » Ma ropen dèc'h er plas brema eur vioc'h all,
 » Ha ni' alfe qet cessi ho clêm hac ho tamal ? »
 — « Allas ! autrou Escop, ha ni elfe bigen
 » Ancounac'hat Margod, a voa eur c'her douç loen !
 » Hor bugale na ni na vimp james ingrat :
 » Hi voa hor maguerer ; he lèz a voa qer mat !
 » Bez' hor boa e frenet pa nôa nemet ouner :
 » Custum voa diouzomp, sentus voa al loen qer,

» Hac ivez en e yès e vouie respont d'emp-
 » Ha diredet d'an drot d'hor c'haout pa e galvemp.
 » E bles du voa qer flour ! var e zal ur baill guenn,
 » A rê e distingui etouez saout an dachen.
 » Gant va fobric Pipi e c'hoarie bemde ;
 » Pa zaille var e c'hain, hi voa fier neuze.
 » Lampa rê a bep tu, entent a rê farçal :
 » Al loën paour a guerze evel un dremedal.
 » C'hoarzin a rempl neuze ; bremâ ni vouel dourec ;
 » Allas ! aotrou Escop, re oump hirio giriec .
 » O va Doue ! allas ! n'esperân qen enni :
 » Bigen ur vioc'h all n'ello e ramplaci . »
 Fenelon a selaou ar c'hlêmon a franqis,
 Gant ur galon dener, equis tad a ilis.
 Mes an nos a dosta ... Pa zoar qen occupet,
 E tremen an amzer peurvuia prim bepret.
 Prometi a ra dont d'o gûelet hep dale,
 Ha gant eur ear laouen e qimiad dioute.
 « Oh ! aotrou Escop qez ! eme ar verc'h rian :
 » Mar carfec'h ouz Doue e goulen d'emp buan,
 » E vemp sur diouti. — Tavit, bugaligon,
 » M'em bo sonch diouzoec'h ebaris va fedennou . »
 Mont a ra en e hent, hac e sonch en dud qez,
 Da rapari o c'holl, d'o laqat en o ez.
 Bale a ra bepret adreus dre 'z prajeyer,
 Ar rest an abardaerz ; ha var bordix ar rivier
 E sonch gûelet eun dra eun nebeut o remu....
 Tostât a ra goustad demeus ur vioc'h du !..
 Tranqil bras voa eno o feuri e-unen.
 An escop mad a zail var ar gorden buan,
 A hanav al loën qez, pini hep n'em sponta
 A lès e c'hemeret qer tranqilic ha tra.
 Fenelon o c'hoarzin, a frot dezji e fenn
 Gant e zorn delicat, hep leusqel ar gorden.
 Mes petra da ober ? poursu a rêi e hent,
 Distrei da dy Margod, pe gounit qer qerqent ?
 « Mâ ! emezân, e c'hass diouc'h-tu a zo guelloc'h :
 » Nebeutoch a zaelou vo scuillet d'ar vioc'h . »
 Ar gorden en e zorn, gant joa vras e vale,
 Hac ar vioc'h en htejuill a bas a bas neuze.
 Deut, tud vên eus ar bed, da velet eur prelat ;

(328)

(329)

- Mes dreist oll, c'houi pers a zo carquet a stat ;
 Diredit d'er gûelet gant peseurt madelez
 E teu d'ober bonneur demeus eun tiéquez !
 Daoust ma zep arc'hescop, ne ra c'as eus a ze :
 Ar pez ra hoc'h orgoull, hac én dal an act-se ?
 Fatic e voa meurbet pa éru eñ ty plous ;
 Tud an ty a bede, na glêvet nep seurt trous.
 Eñ ty - se a vizer e voat oll en chagrin,
 Endro d'eun tamic tan, d'eur c'houlaouen roussin.
 Fenelon sioul a sco var an nor goustadic :
 « Digorit, emezan, din ha da Vargodic.
 » Cetu ho pioc'h dû a rentan amâ d'éc'h :
 » Eñ em rejouissit Ar peoc'h ra vo ganéc'h.
 Oh ! na pebes joa vras a zo eñ tiéquez !
 Pepeb contantamant zo etouez an dud q'ez !
 Ouz treid an arc'hescop en em strincont neuze :
 « C'houi n'eñ doc'h get un den, mes un c'el eus an êe,
 » Güir messenger Doue, pehini leun a vad
 » Eñ em bresant amâ dirac hon daoulagad.
 » Evit hon assuri hoc'h eus trejou eun den ;
 » Rac se n'hon eus neb avon, a ze bezit certen.
 » O c'el mad » Bewzet oll ebars en o daelou,
 Hac an tad, hac ar vam, hac ar vugaligou
 A boqe oll d'e dreid gant güir anaoudequerez,
 Gement voant anaoudec demeus e vadelez.
 — « Savit, va bugale. Dirac Doue heqen
 » E tleer daoulina e quis güir gristenien.
 » Me zo hoc'h arc'hescop, mes ne down get eun c'el,
 » Eveldoc'h, va zud paour, me zo un dey mortel.
 » Lavet e meus Margod, hac vit ho consoli
 » E meus sonjet ractal e digass d'éc'h d'ho ty.
 » Ah ! perac na meus get ellet dired buan,
 » D'ellout gentoc'h donet da lemel eus a boan !
 » Neus fors Cetu - hi deut ; qemerit anezi :
 » Eurus en em gavän d'he renta eñ ho ty . »
 — « Penos ! autrou Escop, oc'h eus ellet qemer
 » Gement all eus a boan evit tud er vizer !
 » Deurvezit, ni ho ped, receo hon trugare :
 » Ra baro varnoc'h - hu oll madelez Doue ! »
 Neuze e lavarjont da Vargodic diouc'h - tu :
 « Penos, Margodic paour ! te hor c'her bioc'h du ,

(330)

(331)

» Ec'h eus ellet sonjal donet d'hon dilezel !
 » Gant ar c'heuz hor boa did e voamp prest da vervel .
 » Mes anfin, rentet out ; cede ni hep anfen .»
 Neuz e voe frottet flour e c'hôf , e c'hein , e fenn .
 Margod a voa sansibl da eur seurt allazic ,
 Hac a voa gwyê meurbed d'o soignou magnifiq .

—« Ret eo , eme 'y Escop , ò va bugale guer !

» Distrei bremâ diouc'h-tu , mén em rentin er quær .
 » A boan e vin êru gent ma tarzo an de ;
 » Rac se , gen a verzo ; adieu, va bugale
 » Aouy bras a meus na ve tud va zyz glac'haret ,
 » Mén em apercevrout ne down get antreet .»

(332)

—« Gementê a zo just , eme oll dud an ty ;

» Ho courzout dianget d'hon renta eurus ni .
 » C'houi zo gement caret !... Hit d'o c'honsoli prest ;
 » Mes n'effot get var droad , vit se ni em attest .
 » Depordit , ni ho ped , Autrou , eur momentê ;
 » Rac arabat e ve ho peach d'êc'h fatê .»

Neuz e n'em lezejont oll gant ar brassa hast
 Gant brencheyer d'ober , de zouguen , eur c'hravast .
 Mes qerqent eus a ze ar brud zo n'em sqignet ,
 Hac an amezeyen a zo prim diredet .
 Da voarnissa 'r c'hravast tro var dro a zeillou ,
 Ha d'en orni 'r brava eus a fleur ar prajou ;

» Greomp eur golo coant vit e voarantissa ,
 » Ma vo gempen ha clôs ; hor joa zo ar brassa .»

Fenelon ^{zo placet} en em blaç , ha qerqent mil celeo

A repet tost ha pell ar c'hri a joa a gles .

An oll a voa fier da zouguen Fenelon .

Pebes joa a zantent er fonç eus o c'halon !

Gant paqajou goulou roussin o devoa grêt

Flamboezennou pere a voa oll allumet .

Ar c'hortech voa nombrus , hac an oll a gane ,

Gement e voant leun -joa e creiz an novez -se .

Fenelon er quis -se en triumph voe douguet

Betec en e bales gant ar c'heiz paysantet .

Enor ra vo atao ebars e peb calon

Da zoucter , da vertus , da furnez Fenelon !

(333)

A. Lédan . 1843 .